

# ANN HINI GOZ

27

- |  |  |
|--|--|
| <p>Ann hini goz eo va dous,<br/>Ann hini goz eo zur !</p> <p>Ha koulskoude, war a welann,<br/>Ann hini iaouank ar vravran.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Ann hini iaouank a zo koant,<br/>Ann hini goz e deuz arc'hant.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Me ne d-ann morse d'ar marc'had,<br/>Na ro d'in-me gwerz boutaillad.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Ann hini goz am c'houdu mad ;<br/>Ann hini goz a zo d'am grad.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Ha koulskoude ebarz e ker,<br/>Ann hini iaouank a garer.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Ann hini iaouank zo ker sounn !<br/>Ann hini goz zo 'unn tammik kroumm.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Ann hini iaouank zo lijer.<br/>Ann hini goz a zo pounner,<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Ann hini goz e deuz bleo gwenn,<br/>Ann hini iaouank bleo melen.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Ann hini goz, liou raden zec'h,<br/>Ann hini iaouank liou an erc'h ;<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Liou ann erc'h eo hag hi ker ien,<br/>Na ra gozik eur zell ouz-en.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Ha koulskoude n'ouzounn perak<br/>Ma c'halon ra tik-tak, tik-tak.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Tik-tak a ra ma c'halon baour,<br/>Pa'z ann da skei war doull ann our.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Tec'h alese, tec'h kuit, tec'h pell !<br/>An hini goz a zo kant gwell !<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Ann hini goz a zo kant gwell ;<br/>Ne ra ket taillou demezell.<br/>Ann hini goz, etc.</p> | <p>Diaked ann demezelled,<br/>Diaked e tri rann ar bed.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Demezelled na reont bepred<br/>Nemed goab euz ar vretoned.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Pa daolann dourn war benn he glin,<br/>Ann hini goz a c'hoarz ouz-in.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Ann hini goz zo bretonez,<br/>Ann hini iaouank zo galleg.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Fae eo gan-en gant ar Gall brein,<br/>Gant kroc'hen ann diaoul war he gein.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Fae eo gan-en gant ar C'hallez,<br/>Gant-hi karnou enn he botez.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Goude tri deiz e skuiz pep den<br/>Gant glao, avel ha merc'h estren.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Mar komzi a briedelez,<br/>Komxit d'in euz ar vretonez.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Ne lakfenn van pa ve laret<br/>Eo ar vretonez groac'hellet.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Evit-han da vont groac'hellet,<br/>Eunn aval, blaz fall n'en deus ket.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Bezet drouk gant neb a garo,<br/>Troc'het ann ed, dorned e vo.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Bezet drouk gant neb a garo,<br/>Ma dous ha me ni eureujo.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Ni gousko enn eur gwele kloz<br/>War ar pell fresk bemnoz, bemnoz.<br/>Ann hini goz, etc.</p> <p>Ha pa ve ker koz hag ar bed,<br/>Gan-en e vez o gwalennet.<br/>Ann hini goz eo va dous,<br/>Ann hini goz eo zur !</p> |
|--|--|